

Imbourc'h

Etre dec'h hag hiziv



Niverenn 345

30 a viz Du 1998

Youenn OLIER

**ETRE DEC'H
HAG HIZIV**

IMBOURC'H

1998

Ur ger a-raok.

Ar pezhioù-barzhoniezh-mañ da heul a zo bet savet etre 1991 ha 1999, hogen dreist-holl er bloavezhioù 1991, 1992, ha diwezhatoc'h, e 1996, 1997, 1998 ha deroù ar bloaz-mañ, 1999. N'em boa savet pezh-barzhoniezh ebet a-c'houde 1974, a gav din, nemet ar re a savis a-ratozh evit an dastumad klok eus va barzhonegoù, a embannis e 1987, dindan an talbenn *Kelc'h an Amzer*, am boa arveret evit ar c'haierad diwezhañ am boa moulet e 1974 endeeun.

Ar broud da sevel pezhioù kentañ ar rumad-mañ a oa bet ur c'hleñved hir ha poanius a c'hoarvezas ganin etre an hañv 1991 hag an nevez-amzer 1992, c'hwec'h bloaz bennak goude ma'm boa kuitaet Roazhon evit dont da Gistreberzh d'ober va annez, e dibenn ar bloaz 1985.

C'hoant am boa bet, da gentañ, sevel barzhonegoù hir a seurt gant ar re a gaver stank el lennegezh kembraek, pe c'hoazh e-barzh oberenn Roparz Hemon, a zoare enta gant ar re am boa-me aozet e diwezh ar bloavezhioù '50, pa'm boa

kempennet, da skouer, *Amred ar Mizioù Du*. Re zalc'het hag emellet e vezan avat gant skridaozadur ha mouladur ar gelaouenn *Imbourc'h hec'h-unan*, - ul labour danvezel-rik, evit ar pep brasañ, a-hend-all, - evit gellout stagañ da vat va spered ouzh ken hirañalet trevell. Setu, ne vo kavet er c'haierad-mañ nemet pezhioù berr dañzeet war ar prim, evel maz eo kalz eus ar pezhioù a c'heller lenn en dastumad *Kalc'h an amzer*, a zeuas er-maez daouzek vloaz 'zo, forzh penaos.

Daoust hag un oberenn a varzhoniezh eo, e gwirionez, an oberenn-mañ ? Evit gwir, bez' e c'hellfen lavarout n'eus fellet din nemet ijinañ dihistelloù gant ar soñj e vint damgomprenet hep bezañ peurvezet ; n'em eus bet ken c'hoant enta nemet eztaoliñ, gant gerioù all hag en ur stumm all, mennozioù displeget hag addispleget ganin penn-da-benn d'am oberenn lenneget en he fezh, en ur seniñ un diskan bepred arreet ganin, par d'un hiboud o tistreiñ dalc'hmat evel blennotenn ur mordrouz war an aod.

Y.O.

DIOUGAN

DEC'H

DIOUGAN

Evel ur sin a beoc'h
emañ stignet mantell an neñv,
glas ha difiñv en egor glan,
'ispilh outi ar bezv bresk,
a-us d'o c'hefioù gwenn
bokedoù abafet o delioù daskrenus
en enderv pout ;

hag a bep tu ouzh o gronnañ
fistilh diniver ar sapr hag an elv
el liorz h nes o sarac'hiñ ;

hag en disgwel, hiraezhus,
galv ur gudon lent a zasson ;
marvailhoù rouez ur golvan gren
o tishiliañ en hañvezh gor...

Er bed ec'hoazet e tavan,
bamet da gened tec'hus
ur predig a beoc'h
e-kreiz an argoll,
kanevedenn verrbad an hañv peurbad
e lein ar furvaven.

DISTAN

O oabl toueziet
e faltazi rik ar stummoù,
dantelezh a hez gwenn ha glas
skourret e lein an hollved,
intret gant gouloù gwan
an enderv mik oc'h echuiñ,
tañva a rin da ziskuizh
pa dec'h diouzh va c'hreud
evit ur pred,
broud ar boan diarsav
krog em c'horf hep damant
'vel ur c'hi kounnaret.

#####

GWERC'HEZED

Nag a bellzo hoc'h anavan,
bleunioù uvel ho tremmoù bresk,
gant ho selloù drant ha seder,
ken peoc'hus !

Setu deuet an here,
hag en hoc'h hez e repozan :
biken ne vreino ho klanded
en arnod arloupet
da deurel frouezh en aner.

#####

DISKAR-AMZER

En abardaevezh hirnezus
'mañ o vale an avel sin
a zoug war hec'h askell
kemenn trugarezus
an Eost oc'h azviñ.

Serromp, ô va ene, er bouteg barr
frouezhenn c'hwervañ hor strivoù put
a ginnigimp d'an Eoster
he zreanto gant e c'hwekter
e gouloù kuñv an hañv difin.

#####

ADKAVIDIGEZH

O kened klouar am ganas,
ennout ez on soubet e dibenn
un devezh
karget a ganennoù seder :
Ur c'hi a chelp en diabell,
ur goulm a glemm leun a zouster...
evit pegeit
en ho klevin ?

Da zorn a c'hedan en arvar dall
argollus
d'am ren d'ar Gened dreist arallvedel,
en tu all d'ar skeudoù,
en tu all d'an trouzioù,
en tu all d'an tremen diastal
e-lec'h m'en em daol ar stêr diharzus
er meurvor sioul ha digeflusk,
tanknevezus,
a vriatay war e askre
da virviken,
kement kened hon achantas.

DIDEC'HADENN

Ar soñj ac'hanout
gloazus ha pistigus
a sav em c'hreiz en enderv pout,
didec'hus, bugel,
didec'het da Announ,
lorbet d'an erevent
az kalve heskinus
a'n tu all d'ar glannoù.

Ar c'houk a c'hedes
en un noz hep dihun,
azavet dit hep mezh ebet
gant Mistri ar Gaou,
a voe nac'het ouzhit
en desped d'az kortoz
hag en e lec'h splann e tarzhas
evel gouloù trelus
ur beure diziwezh
dihun peurbadel
Heol ar Speredoù,
strink un deiz dirakwelet
leun a glouarijenn
divent an diamzer,

a zigoras d'az tarbenn
war e varlenn tener
divrec'h karantezus
e gouvran tiezh divevenn.

#####

AROUEZVOUD

Aotrou,
a'm mag tener
gant da gomz ha da gorf,
na pegen tenn ar gortoz hir
a zev, grizias, kreiz va ene,
feunteun verv o redisañ em c'hreiz
prest da strinkañ 'vel ul lanv
o chalañ trumm...

Betek pegeit, Salver Jezuz,
en ho kedimp e duder an anken,
e karc'har ar Gelen,
er Bed a savas ho Tad
'vel kurunenn ho Rielezh,
bet aloubet d'an Eneber
a chadennas ho kwazourion ?

Deuit, 'n em ziskouezit,
ma welevo war an hollved
hep antronoz
Lugern ho tremm,
ma vo kaset d'o zeñvalded
evit atav da virviken

an erevent didrugarez
a venne herr ha foll
bac'hañ en o noz hep distro
flammed klouar hoc'h aotrouniezh.
hollvedel.

#####

HERE

Hañv dic'hedet,
erru en-dro 'vit ur pred berr,
da voenañ a ran e-kreiz an enkreuz
a zo ouzh va c'hriñnat hep astal,
evel un talar o treiñ dizamant
e-kreiz ar gouli
aet e go e don va bred.

El liorz daskedus
war-lerc'h ar glav
e c'hlazas a nevez leton ha delioù ;
dre ar barroù 'n em sil al luc'h,
boked a skinoù o strinkellikat
flouret d'an avel sin :
chan an emgann e dibenn an devezh !

E-tal an avalenned
e trid ar geot marellet a c'houlou :
skleur ha gwasked,
skeud ha sklaerder,
o c'houren a-viskoazh
kenweet 'n ur c'henstriv divent
penn-da-benn d'an alvez,

a dermeno, 'vel ur gizell
tresoù da zremm dilavarus
en neñv divent ha trafadel,

ken na lintro e lein an ebr
an encoù kadarn
a c'houzañvas diglemm
gant fiziañs ha kariad
aprou skarus ar vuhez
a ziferas o flanedenn,

Hañv dic'hedet !

#####

DIBENN AR BLOAZ

Er parkoù noazh e kan ur c'hog ;
ur marc'h difiñv e vlevenn c'hell
a vored e lein ar c'hrec'h :
e-kreiz ar goañv klouar
eo paret an heol gwenn
a riskl gorrek war an dremmwel
tost da dolzenn deñval ar c'hoad,
o lezel er wenodenn
war an delioù marv melen ha mouest
ur palleñv teuc'h leun a c'houlou,
hag er c'hammdro dic'hortozet,
trumm e flammin
treluc'h ul lenn digenvez,
melezour digunvez
a gannder estlammus,
o tougen war e c'horre
un alarc'h-gwenn dilavar
a ruze glan a-hed ar c'hlann
war-du un heol
karget a gevrin
ar Garantez Tragouezel.

#####

YENIJENN SPLANN

Hiret goañvezh karget a boan,
pegoulz ez echui ?
Ha padal e karan da gened,
kantenn arc'hant an heol
o spinañ an dorgenn,
gwisket e gouelioù tanav
ur vorenn wenn :
azav tener un distro hiraczhus,
promesa an eost peurbad,
mousc'hoarzh an neñvoù kouvrant,
frealz an nevez-hañv
o kellidañ e don an atil,
hirastennet diwar an oabl
betek bevenn an alvez,
a vir, dirgel ha diles,
mammenn gevrinus va boud.

#####

REZID

Evel ma teujout da vezañ
e vanjout
hag e-lec'h ma tegouezhjout
e chomjout
sonnet da viken er youl dien
a zibabjout en dic'houlou
karet ganit.

#####

REZID

Evel ma rejont da veat
e vapont
ha o-let'n ma lapanont
e chonjont
mauz da v'rao et yad d'ant
e r'leant en de' l'ont
f'act gant

#####

TONKADUR

E-kreiz anken pe c'hourvolez,
e-kreiz enkreiz pe levez,
'vit ar vennoz pe ar vallozh
peurbadel,
e tizolojout erziwezh holl
piv e oas e gwirionez.

REZID
#####

TONKADUR

E-kreiz anken de c'houroier
 e-kreiz euzek de levezek
 vit ar vennek de ar velloz
 goulzid
 e toulzou euzek de
 div e oad e levezek

XXXXXXXXXXXXXXXXXXXX

MARONAD DICH'HLAC'HAZ

Louarn, tarpaz kaber
 Teuzeg klodour
 holl gizher ar c'hanton
 Pevadig gwisket lounn ha kempou
 et lonnig marall
 kaset e voad
 e tarzh ar gwalc'h glacar

KIZHIER

war dro
 herbet e
 gant un tonkad dour
 war arvor ar c'hroezek
 e-koll, s'evant
 Gouron didra'bus
 da legad k'rat 'a un empenn abardou
 e d'arzh da holl
 ha d'arzh e voad
 plouzid ead
 war r'it an hent ar hent
 hep gottur deuz
 e-kreiz ar holl

liket war ar hent
 euz goulzid ead

MARONAD DIC'HLAC'HAR

Louarn, targazh kadarn,
Tevezeg klodveurek
holl gizhier ar c'hanton,
Pinvidig gwisket tomm ha kempenn
ez toneg marellet,
ganet e voes
e tarzh ur gwanten glouar
war dreuzoù Kernev ;
harluet e voes
gant un tonkad didrugar
war arvor ar c'hreisteiz,
o koll, siwazh,
gouron didrec'hus,
da lagad krak 'n un emgann dibardon,
e deroù da hoali ;
ha diskaret e voes,
planedenn dall,
war ribl an hent er beure blin
hep gortoz deomp
e-kreiz an hañv.

Biken mui ne zeui d'am ambroug
d'ar pardaez mik,

o kerzhout sioul war va lerc'h,
dilavar ha karantezus,
'vel un iskis a gi !

#####

TARGAZH ENKREZET

Forbann,
kadour kouvrant lagadet glas
ha lemm da sell, par d'un talar,
targazh dispont he bepred trec'h,
perak enta,
e toull an nor digoret dit,
e lefvez dalc'hmat hep chanañ ?
Eus pe varadoz
anav dit hepken
out bet forbannet
hep spi a zistro ?
Eus peseurt gwennva da viken kollet
e virez ez kreiz
ken kalet cñvor,
evit krial ken truezus,
war dreuzoù an ti,
tasmant tamallus,
damwenn ha doanius
e peuznoz klouar
an hañvezh diziwezh ?

#####

ROUANEZ HARLUET

Rouanez a Iwerzhon,
Kazhez chañsus ez kwalleurioù,
pe ael mirer az kwarezas
a-dreuz argolloù ar meurvor ?
Pe ziwaller az ac'hubas
o treuziñ peder gwech
donderioù an islonk ?
Kazhez dibaper ha barnet d'ar marv
evit bezañ kuitaet he bro !
Setu te, goude hir ergerzh
erru er porzh e Breizh Vihan
a-benn ar fin,
rouanez harluet
war aodoù ar c'hreisteiz, -

nemet e talc'hez e donañ da askre
eñvor diresis ar vammvro a golljout
hag an tilu az tesavas ;
ha gant ar velkoni,
bep an amzer,
gwisket leun a zellid
ez tilhad gwenn ha du,
deuet da vezañ rouanez a Vreizh

en desped dit
ez eztaolez gant da vouezh vouk,
hiraeczhus,
koazezet e lein ar ganastell
ar c'heuz d'an tir az tinac'has
hag an enez az tistaolas
o reiñ deomp el laezioù
darlun urzhazel
ur vriegezh kollet !

#####



An elvenn el liorzh...

KORKER DIZANV


A-hed eurvezhioù, aba bloavezhioù
emañ o c'hedal war dreuzoù an nor,
gourvezet mik hep klemm nepred,
na krediñ dont en nevedenn,

gwisket truezus e-giz ur paour,
en e vantell feur rouz ha gwenn
dislivet ha garv e vlevenn,
hep ti nag aoz 'hed ar amzer,

nemet o parañ hep fallaenn
e sell melkoniet war brenestr an templ,
a zigoro a-benn ar fin
en deñvalded o nesaat,

ken na c'hlavo a lein an neñv
bevez rinel ur gaouad trumm
a vevañs sec'h hirc'hoanaget,
a blaouio en un taol-kont.

Ha goude se, en noz teñval,
anaoudek hag azeulus,
ez ambrougo a-zoug e gamm



...ec'h eus gwisket d'am zi seder

NEDELEG

War al leurgêr ec'hon,
aloubet gant an noz
e kouezh ur c'hlizhenn
munut ha dison
en digenvez ;
ha war-laez, en deñvalded
eo paret, garlantez trist,
ur steudad a lampoù paper
ha gwenn ha glas ha ruz ha gwer,
hejet gorrek en avel noz
evit ur gouel dic'hoanaget
er bed dilusk ha dinerzhed
ha na gred mui ha na oar mui
e voe salvet.

#####

UGENTVET A VIZ KERZU

Pa oa ar gwez noazh ha dibourc'h
en estrenvan war ar c'hrec'hioù,
difiñv, ahont, war an dremmwel
izel an oabl ha dic'houlou,
o waskañ pout ha trumm an douar
'vel golo ploum an ifern,
ha put an disavel,
ha mac'hus an didrouz,
ez on aet goustadik,
pirc'hirin peurbadus,
betek kêr va c'havell
ahont e penn an aber.

O porzh moredet,
digeflusk da zourioù
gwer ha divoull
en aer klouar an enderv-mañ,
ne zougez ez askre
a-hed ar c'haeoù didudet,
e-tal an tiez dall o stalafioù serret,
nemet tropell tasmantel
ar bigi sorennet

e-doug ur goañv na echu ket.

E pelec'h emañ ar Sturier-meur
a roio deoc'h buhez en-dro,
o stennañ ho kouelioù reudet d'an avel vor
davet glannoù ar c'hourvolez.

#####

ROZKUDON

Na pet gwech, d'abardaez,
pa vez an noz o serrañ,
hag ar gudon o kanañ dous
e tiskennis war va fouezig
betek ennout,
Feunteun venniget enoret a-viskoazh
ez nevedenn ouzh tor ar c'hrec'h
e-kreiz ar C'hab ;
ha war da dro laz an elv
o wintañ 'trezek an neñv
'n un aspedenn dreistlavar
lañs o c'hefioù mistr
war-du an neñv.

Eno e vanit kuzh, Gwerc'hez kenveget
feal o c'hedal e kaoued ar vammenn,
deiz ha noz ;

ha war ribl an dour
mik o repoz en deñvalded klet
pa zeu an noz a gammedoù skañv,
e luc'h,
sioul er goubanner-noz

gouleier habask ur goanag didrec'hus
- piledoù ar fideled dizanv
o kemenn hep astal,
Gwerc'hez sakr,
distro didec'hus,
dasorc'h difaezhus
ur beure trec'hliedl.

#####

HEOL AR GOAÑV

Heol diek an dibenn-bloaz,
o'n em stlejañ izel ha trist
dreist d'ar flagenn kuzh en dremmwel,
oc'h echuiñ da redad berr,

arsavet out er C'habelloù
evel ur vell arruz ha mik,
tost d'ar wezenn teñval ha kamm
stouet dispi 'us d'ar voger,

pa son pemp eur e gorre-kêr.

C'hoazh e taolez gant da lagad
karget a zoan un devezh lor
sell da gimiad a-raok kouezhañ
e liñsel kañv an douar du.

Hag adarre gant da splannder
ec'h eus gwisket d'am zi seder
mantell flimin ar winienn
en goloio ken na nozo.

#####

DISKAR AN AMZER

Emañ an heol o treiñ
goustadik en-dro d'an ti
en ur ziskenn e sol an oabl :

o fiñv peurbadus ar skeudoù
o'n em ruzañ el liorz serr,
o tifraeañ davet Announ !

Ambrougadeg diniverus
ar re garet
aet a-ziwar-wel en nivlenn
a zo henozh oc'h aloubiñ
al letonnennoù glas dargudet
e klouarded an abardaez,

ho tamwelout a ran
a-dreuz va c'houn
etre barroù ar wezenn fiez
hag ar saprenn he bleñchoù lemm
hag ar vezvenn o tasskediñ
ma kreñ he c'hef en aezhenn rip.

Bep an amzer e sut ur voualc'h
divi he mouezh en deiz a dec'h.

Pelec'h emañ ar c'houlmed kann
a c'hrougouse gwenvidik
dirak an ti
er broutac'h gor ?

#####

LABOUS ALL

Labous teñval ha mut a-grenn,
estren iskis e dibenn an enderv,
a verzan a-dreuz va frenestr,
sonn evel ur gaouen,
puchet rividik
abaoe un eur
war varroù noazh hiriset
ar wezenn gerez
didroc'het du
war skramm arwenn ar c'hogus serr !

Respont din enta,
a-benn ar fin,
petra a c'hedez
en deiz diasur :

da varv nes hirgortozet,
pe advuhez virvidik
ar gwanten a zeuio ?

#####

MOUEZH EN NOZ

O mouezh degounus
dinodet eus don va eñvor
e-kreiz an noz !

Klevet a-drumm
en tu-hont da bep spi
en ec'honder kaset da get
'vit ur mare,

lakaet ec'h eus en desped din
lanvezh an hiraezh
da sevel em c'halon,
o tibradañ dre'z kalloud hud
roc'hell rec'hus
un tremened beziet,
'n ur zihuniñ em askre moredet
heol strobinehell
va yaouankiz teuzet,

ha dasson an tonnoù
war wended ar bili !

#####

MOURNEN EN NOZ

O mornañ degennas
liedec'hañ eus dou va c'haer
e-kreiz en noz !

Kloer a-dreuz
en tu d'ar c'hamp
en e'zouder laer da d'ar
'ar ar c'haer

laket e'zou ar c'hamp
laket en c'hamp
la sevel eus c'hamp
e-touez d'ar c'hamp

laket e'zou
e-touez d'ar c'hamp
laket e'zou
e-touez d'ar c'hamp

laket e'zou
e-touez d'ar c'hamp
laket e'zou
e-touez d'ar c'hamp

laket e'zou
e-touez d'ar c'hamp

AR C'HI-HEMOLC'H

Gant e sell azeulus,
savet war-du e vestr,
e kinnig hep azrec'h
emroet hep distro,
d'an Aotrou en magas
e breizh a garantez.

#####

ARZOUR

A daolioù morzhol arloupet
e tiskolpjout hep damant,
hep paouez nag ehan na diskuizh
ar materi
a-hed an amzerioù diziwezh,
a-dreuz an alvez divevenn,

maz anadje erziwezh
er pred hag el lec'h
dibabet ganit a-holl-viskoazh
douster da zremm,
pep kened holl,
dre wered da wizion
gouestlet dit o rezid !

#####

GLANDED ADKAVET

"Munda cor meum"

O mammenn va zrivli
o tarzhañ em c'halon
hep nepred mont da hesk,
froud diharzus o tisac'hañ
em c'haoued hep mennout din
e donañ va askre,
feunteun leiet e-kreiz va boud,

dre beseurt marzh dic'hortozet
out bet a-drumm sklaeraet naet
troet a-kerzh dre nerzh da rad
d'ul lanvezh skeltr a gariad glan
o flourañ kuñv dremm an draezhenn
d'ur beure kann leun a zouster ?

#####

REN AN ANDEOLION

"A gente iniqua et impia erue me..."

A-viskoazh e fougasont
gant stirlink o armoù
en ur c'hervel war o skoazell
hep mezh ebet

Doue ar vadelezh
da gefleuniañ o drouklazhoù,
o sakrañ, hep morc'hed,
o renerion,

leun a wad o daouarn
war-lerc'h o muntroù,
en o zemploù meur revegus.

Dre an tan hag an dir
e savjont o riez
'n ur gas o lorc'hentez
betek bevennoù pellañ an douar,
o tisprizout ar beorion,
o tismegañ ar yonion,
oc'h enoriñ al lazherion,
o renaviañ da anv,

o tistrujañ da sent
gant o ardivink-da-lazhañ,
klod o mammvro dre ar bed holl,
o kas da get da Iliz
a-benn krouiñ o Iliz-int,
Iliz an Droukspered
a vennjont ledañ
a reter da gornog
war an tir en e bezh.

Ha sell outo, Arloz,
staliet otus 'n o brazoni,
o sevel bepred delwenoù
da wazourion o galloud ifernel
war o gwaregoù-a-c'hourzrec'h !

Ha distruj-int,
d'az tro,
ma vo diverket o istor
ha disoñjet o brud,
ma vo anavet ha kenveget,
hepken,
dre an hollved a-bezh
gloar da zasorc'h !

31 a viz Kerzu 1998

Mil-nav-c'hant-navgont-nav,
riñv al Loen war an tu-gin,
Riñv al Loen o ren ar bed,
dorioù dir ar c'hantved
o serrañ gant storlok
e-kreiz ar riotoù
hag ar rendaeloù,
e-kreiz an hudurniezh
hag al linkradurezh,
e-kreiz al lastez hag al lorgnez,
e-kreiz ar stronk hag ar gwad,
e-kreiz ar fank hag ar vouilhenn
berniet betek an neñv
war-c'horre an douar,

hag ar stign o kouezhañ
war leurenn hurlinkel
ur c'hoariva a vaskloù-euzh
ifernel,
ma tifret c'hoazh war e c'horre,
e koroll an Ankoù,
e korwent an Anken,
dindan un oabl-noz

disteredet
Mistri dasmantel
an denelezh dic'hoanaget
kasaet dezhi deiz he C'hrouer !

#####

BEZVENN

E koun Abeozen

Bezvenn vistr ar yenderioù,
bezvenn voliac'hus an hanternoz,
kluchet gwevn ha gwenn
en tu all d'ar voger voredet
e penn al liorz h riellet,
gronnet rividik
e dantelezh voull
da varroù rouz,

gant pebezh nerzh estlammus
e wintez da gef arc'hantet
war-du glasted ar furvaven
stennet diogel a-us d'hor pennoù,
arouez hag azav frealzus,
karget rez a hez
ar c'hlanded
hor gortoz.

#####

GOUBEIZH

Goubeizh ar feiz, briwerc'h kalet :
spiañ bemdez an digredus,
kerzhout dalc'hmat war-du ur pal
dreist d'an dremmwel kuzh er vorenn,

kerzhout dalc'hmat hep ehanañ,
er gouelec'h krin a-dreuz ar gor,
hep gedal glizh d'hon distanañ
a-hed un hent n'eus fin dezhañ,

o klask un dremm n'anavomp ket
hon treanto gant e zouster,
nemet a vo hol levez
da virviken en ur bed all,

o c'hoanagiñ en noz a serr
en-dro deomp en dezerzh blin
tarzh un devezh leun a'r splannder
hor gwisko klok en neñv trafad.

#####

P.3.

"egor" : "ec'honder".

"pout" : "pounner ha doues", o klotañ gant ar c'herneveg

"pos".

P.5.

"hez" : "peoc'h", hervez ar c'hembraeg "hedd".

"kreud", "caro" e latin, dezhañ da ster : ar c'horf bevaet gant an ene, enebet ouzh ar ger "kig" a zo danvezel-rik e dalvoudegezh. Amprestet eo ar ger-se diouzh ar c'hembraeg "cnawd". Kv. ivez an enebadur e gresianeg etre "sarks" ha "sôma".

P.7.

"here" : "diskar-amzer", evel e "hydref" e kembraeg.

P.11.

"tanknevezus", hervez ar c'hembraeg "tangnefedd" ; amañ, "karget a beoc'h".

P.13.

"pout" : kv. uheloc'h.

"announ" : bed ar re varv.

"azavet" : "prometet", "grataet", hervez ar c'hembraeg

"addaw".

"kouvran tiezh" : "mignoniezh tener", deveret diwar ar brezhoneg-krenn "kouvran".

P.15.

"redisañ" : kregiñ da virviñ.

"gelen" : "eneber o kasaat", hervez ar c'hembraeg. Adal 1945, ez eo bet implijet ar ger-se.

"rielezh" : perzh an neb a zo roue.

"gwazour" : servijer.

P.17.

"dic'hedet" : diwar gedal, "dic'hortozet".

"moenañ", da dostaat ouzh ar c'hembraeg "mwyno", hogen emañ ar ger-se e henvrezhoneg ; talvezout a ra "tennañ plijadur eus".

"alvez" : "kosmos".

"trafadel" : en tu-hont d'ar badelezh.

"kariad" : "karantez", hervez ar c'hembraeg.

P.19.

"tragouezel" : "en tu all d'an amzer, hep deroù na diwezh.
E kembraeg : "tragwyddol".

P.21.

"azav" : promesa, diwar ar c'hembraeg.

P.23.

"rezid" : frankiz, diwar batrom ar c'hembraeg, hogen emañ ar ger "rez" e brezhoneg, en droienn "koad-rez", "koad hep skoulm."

P.25. "Gourvolez" : levenez vras, hervez ar c'hembraeg.

P.29.

"Louarn" a oa bet ganet e Plezidi, ha roet e oa bet d'am merc'h vihan, Emili. Koll a reas ul lagad en un emgann e Kistreberzh, ha deuet da vezañ born, e varvas, diskaret gant ur c'harr-tan. E-pad an hañv, pa veze an noz o serrañ ha didud straedoù kêr, e'm amheulie a-wechoù betek treuzoù ar maeziou, o vale un ugent metrad dirazon, ken na veze lakaet da dec'hout gantourni ur c'harr-tan o tiboufañ trumm en ur c'hamdro. "Tevezeg" : "Priñs".

P.31.

"Forbann" a oa ivez d'am merc'h vihan Emili. Degouezhet e oa war-lerc'h "Louarn" e Kistreberzh, ha klask a rae, moarvat, un domani dezhañ e-unan. Ganet e oa e Poullgwazeg, e-tal Gwaien, a ouenn hanter siamat, ha gouvidek evel e vamm a veze bepred o leñvañ.

P.33.

"Rouanez" a oa bet degaset eus Iwerzhon gant va merc'h Rozenn, hogen pa zistroas houmañ da Zulenn, ne voe ket lezet he c'hazhez da zistreiñ d'he bro gant ar valtouterion iwerzhonat, dre ma n'he doa paperenn ebet o tiskouez e oa bet broudadennet a-enep d'ar... "gonnar". Bez' e tlee bezañ piket hep truez ebet, hogen dre drugarez e voe aotreet evelato da zistreiñ d'ar c'hevandir, hec'h-unan-penn. Erru e Rosgo e kavas bod en ul leti pemp-steredenn evit kizhier, e Montroulez ; eno e voe atoret ganeomp ha degaset a-benn ar fin da Gistreberzh, nemet ken strafuilhet e oa bet ar gazhez kaezh gant he beajoù reuzius, serret en ur gaoued penn-da-benn dezho ma tec'has kuit, kerkent hag erruet du-mañ, da repuñ war ar maez. Ne voe tu ebet d'hec'h adkavout; kavout a rae deomp e oa kollet da vat. Tri miz war-lerc'h, tra ma oamp o tiannezañ an ti a oa bet feurmet gant va merc'h e Kistreberzh, en em ziskouezas souden e toull ar prenestr, pa oamp o c'hortoz an nebeutañ. Degaset e voe d'ar Marchiz, hag eno en em voazas da vevañ en hon ti, anvet, diwar neuze, en he c'harg a logotaerez kentañ-rumm, o labourat e-pad an noz, hag o kousket c'hwek e-pad ar peurrest eus an amzer er gêr. Evel ma lavare lez-vamm va mamm, ur gapenn eus Priveilh, a-hervez : "n'eus mann er bed ken evurus hag ur c'hazh" (peurvuiñ !) Se a c'hell bezañ gwir, a-wechoù.

"ac'hubiñ" : amañ, "saveteiñ".

"tilu" : "tiegezh", hervez ar c'hembraeg.

"darlun" : skeudennadur.

"briegzh" : "dellid".

P.35.

Dont a rae ar c'hazh-se eus karrdi ur c'higer tost d'hon annez, e-lec'h m'en em liesae ar c'hizhier hep ganreol ebet. Hanter-gouez, na petra, e oa chomet, ha ne gredas biskoazh teurel... e bav en hon ti.

"rinel" : misterius.

P.41.

Eus porzh Gwaien ez eus anv.

P.43.

"Pirc'hirinded Itron Varia Rozkudon" a zo brudet bras er C'hab, ha pa oan ur bugel e oan bet kaset di gant va mamm ha va moereb Anna, e 1935. Emañ ar feunteun war-draoñ, en hanternoz kêr, war hent Mahalon, hanter-grec'h war-du ar Waien, a-raok d'ar stêr en em deurel en aber e-unan ; ne sav ket al lanv betek eno. Lidet e vez atav ar pardon-se da ouel Maria Hanter-Eost, gant ul lidambrougdeg vras, ar bardonerion o tougen piledoù hag o kanañ dalc'hmat, kantikoù brezhonek betek hiziv.

P.45.

Emañ "Kabelloù" ("Ar C'habelloù", e Konk-Kernev, hep ma oufen peseurt ster a zo d'ar ger), war dreuzoù kêr Kistreb-berzh war an hent a gas da Vuzulieg ha da Wened, e-biou da lenn Seleg.

P.49.

"gwanten" : goveliet em eus ar ger-se diwar ar c'herneveg (hag ar c'hembraeg), evit talvezout "nevez-amzer". Gourel eo ar ger-se.

P.57.

"Munda cor meum" : e latin, "glana va c'halon."
"rad" : "gras", donezon gradus, hervez ar c'hembraeg.
"kariad" : "karantez", hervez ar c'hembraeg.

P.59.

"A gente iniqua et impia erue me !" : "Diframm-me diouzh ur vroad direiñ hag andeol !" E latin.
"revegus" : "hardizh ha dichek war un dro", hervez ar c'hembraeg.
"yon" "justus" e latin.
"gwazour" : "servijer". "kenvegan" : "enoriñ".

P.61.

"Riñv al Loen" : "666", hervez Diskuliadur sant Yann.

P.63.

"E koun Abeozen" : dave da zibenn e romant "Hervelina Geraouell".
"furvaven" : golo glas an oabl stiget a-us d'an douar, hogen eus al latin e teu ar ger-se.

P.65.

"Goubeizh".
Tennañ a ran danvez ar plaenadur-mañ da heul eus ar c'hatekiz katolik.

Bez' ez eo ar goubeizh - ur ger goveliet diouzh ar c'hembraeg "gobaith" - unan eus an tri briwer-c'h douekreizat silvidigezhus, sev ar feiz, ar goubeizh, hag ar garantez. Dre ar feiz e kredomp en Doue Treindedel, an Tad, krouer an alvez, ar Mab, eil Nouez an Dreinded, ar C'hrist, Doue ha Salver, a c'hortozer pep silvidigezh digantañ, ar Spered Santel a ro ar vuhez doueel d'an eneoù.

Ar goubeizh a ra deomp ervezout ar wenvidigezh peurbadel evel finvez pennañ ha nemeti, zoken, hor buhez, houmañ o vezañ tizhet d'ar c'hristen dre an emheñvelaat ouzh ar C'hrist; ar goubeizh enta hol laka da c'hortoz ar silvidigezh-se diouzh 'rad' Doue e-unan, eleze, e skoazell c'hradus, ha n'eo ket diouzh an esweldet a vefe diraezet ganeomp dre hon nerzh hag hor striv hon-unan.

A-se, bez' ez eo ar goubeizh-se da lec'hiañ en tu-hont d'an dic'hoanag ha d'an dispi er bed-mañ, pe c'hoazh, en tu all da zilezidigezh ar bed hag an eurvad a c'hell-eñ reiñ drezañ e-unan : n'emañ ket ar c'hristen e chal gant e eurvad douarel, a vez distrujet, n'eus forzh penaos, e pred diwezhañ ar vuhez, ha peurvuañ kalz a-raok, daoust ma tle klask an eurvad-se e bevennoù ar yonez, evel ma tle ivez klask ar yec'hed hag an hoal-vat, a-benn gellout servijout Doue gwelloc'h en ur strivañ da ziazezañ Rouantelezh Doue adal ar bed-mañ. Ar madoù-se avat a zo dav o c'hilsk bepred e sell

da finvez pennañ mab-den a zo en em gevelebiñ ouzh Doue e Nouez ar C'hrist.

Kement-all a c'heller lavarout e sigur ar stourm evit ar yonez kevredel hag eswelled ar gevredigezh hec'h-unan, a zlefe bezañ askoret, hepken, diwar eswelled personel kement nouez denel a zo ouzh hec'h amparañ ; da lavarout eo, anadiñ a ra an eswelled kevredigezhel diwar gantroidigezh personel kement hini a zo perzhiek en ur stroll bennak, ha n'eo ket diwar arveradur ar gwikefreoù maz arc'hwel diwarno ar gevredigezh, - pezh a zegouezh, da skouer, e niderezh ar varksourion hag ar soliadourion, dre vras. Ar goubeizh kristen, avat, a c'hoarvez eus distaolidigezh ar c'henstriv evit ar galloud politikel, a chom mac'hom dre natur; ne c'hell an eswelled er gevredigezh bezañ klasket enta nemet e rez an Iliz erverzet evel kevredigezh ar Sent ; e par an Iliz e tlefe ar c'hristen enta oberiañ, da gentañ, pa vez c'hoazh eus an Iliz ur gevredigezh diles, pezh n'eo ket nemeur er mare-mañ er riez c'hall, pergen.

Kement-mañ a zisplegan hervez pezh a gomprenan eus kelennadurezh an Iliz ; hogen, na petra, ne oa ket ar savboent-mañ va hini pa oan e deroù va redad a emsaver brezhon.

Evit distreiñ da graf ar briwerc'hioù douekreizet :

Eveljust, gant ar Garantez hec'h-unan ez eo intret ar briwerc'hioù douekreizet all ; Sant Pol a lavar, a-hend-all, ez eo ar briwerc'h-se an hini nemetañ a zreistpado er bed all peogwir ne vo mui, neuze, danvez ebet d'ar feiz na d'ar goubeizh, dre ma vo Doue anat deomp, ha diazezet da vat rouantelezh Doue en neñv.

Ouzhpennañ a rankfed ne servij ket ar vertuzioù denel o-unan, betek evel denel, da salviñ nep hini. Stalin, Hitler, Pol Pot ha Castro, h.a., a oa pe a zo karget a vertuzioù e-leizh;

aberzhiñ a rejont o buhez d'an dlead a felle dezho seveniñ. Bezit assur avat ez eo poblet an Ifern, n'eo ket kement-se gant paour-kaezh tud, lonkerion ha pitaouerion, - daoust ma vefe furc'h d'ar re-se kantreñ, - hogen kentoc'h gant harozed lorc'hek ha tud-veur klodveurek stank an Istor, a vil-vern.

Un addispleg all :

Implijet em eus ar ger "briwerc'h" o klotañ gant ar ger hengounel a orin latin : "vertuz". Coleiñ a ra an termen "briwerc'h" un darn eus sterva "vertuz", met ul lodenn anezhañ hepken, dre ma n'eo ket anataet gantañ an arster a 'c'halloudezh', a 'varregezh', a zo emleget en termen latin "virtus", deveret eus "vir", o klotañ gant "gour" e brezhoneg; evel ma ouezer "burzhud" a zo ur stumm eus ar ger "vertuz", "Notre-Dame des Vertus" e galleg o vezañ da dreiñ dre "Itron-Varia ar Burzhudoù". Pa gomzer enta eus "vertuz", "briwerc'h", e ranker atodiñ atav d'ar ster hollek keal an diaester a zo o pleustriñ emzougoù 'zo.

Evit echuiñ e tistroan da emplegadurioù ar "goubeizh" kristen e par ar politikerezh :

E gwirionez, kraf ar goubeizh kristen e par ar stourm politikel a ziazalc'h kudenn ar perzh a gemer ar c'hristen er vuhez-mañ : daoust ha bez' e c'hell emellout ennañ evel en ur c'hoari distag a-grenn diouzh uhelvennad Rouantelezh Doue da ziazezañ adal ar bed-mañ ?

Sellboent an emsav kristen italian *Comunionè e liberazione*, - a vez displeget peurvuiañ er gelaouenn *30 Giorni* ("Tregont Devezh") - a zifenn tezenn sant Eosten diwar-benn an div Geoded, o tisteurel eorizh ur gevredigezh kristen a-gefridi, evel ma oa e talvoud er grennamzer (hogen, dre ma oa un devoud eus kevredigezh kristen europat ar grennamzer, ne weler ket penaos e c'helljed, neuze, bezañ empennet keal ur gevredigezh laik dinevet !)

Bezef pe vezef, sellboent ar stroll meneget ganeomp a-gent en hon amzer eo ne dalv ket ar boan d'ar gristenion klask krouiñ ur gevredigezh kristen politikel dishual, - mar geller lavarout, - na, zoken, sammañ, dre laer, koulz lavarout, talvoudoù kristen war ur gevredigezh distag diouzh an Diskuliadur kristen, an Aviel hag ar feiz. Plegañ a zlefe ar gristenion, dre se, da zegemer lezennoù 'pagan', o tennañ, da skouer, d'an dibriediñ pe d'ar sioc'hanañ, ha da genlabourat enta gant renadoù a bep seurt, komunour dizoue, h.a., gant ma vo lezet d'an Iliz ar frankiz d'en em ziorren, a-hend-all, eus he ferzh hec'h-unan. Ar sellboent-se hon eus bet tro da zezrevell - ha da vurutellañ, moarvat, - er gelaouenn-mañ.

Tu a vefe da zarblegañ d'ul leviadurezh a seurt-se, hogen asoupañ a rafed neuze ouzh daou skoilh dislavarek kenetrezo:

Pe en em serr an Iliz : ha kevredigezh ar gristenion en ur seurt geto, war var a vezañ heskinet, dre maz eus anezho ur getoad, end-eeun ; pe e kemer perzh da vat en arc'hveladur ur gevredigezh dinevet digristen, hogen o vezañ ma n'eus ket c'hoazh a Stadoù rik, a vefe mekanikoù gwirel nemetken, - evel ma c'hellfe bezañ evelato ar C'hevredinad europat, - hogen hepken riezvroadoù, a zo kement-all a Ilizoù, e vo degaset ar gristenion, diwar-bouez o ferzhiadur e buhez ar riezvroadoù-se, da lodañ talvoudoù ha stuzegezh ur gevredigezh direlijiel ha da goll feiz an Aviel, evel ma c'hoarvez e Bro-C'hall er mare-mañ ; er riez-se ez eo bet ar vodernouriezh un hent da hevelebeaat ar stuzegezh kristen istorel, ouzh ur stuzegezh all arnevez, laïk ha digravezel, estren a-grenn ouzh ar stuzegezh kristen istorel.

Un diskoulm a c'hellfe bezañ kavet evelato : diaotrouniekaat ar riezvroad e par ar sevenadurezh, dispartiañ ar Stad diouzh ar sevenadurezh hag an derc'haviant. Penaos avat ? E "Bro-C'hall" da skouer, ez eo dalc'het holl amgant ar c'helenn hag

ar stuziañ gant organadurioù ar Galloud stadel. Gouzout a reer, forzh penaos, ouzh peseurt diaesterioù en deus ranket "Diwan" taliñ, o strivañ da grouiñ ur reizhiad-skoliañ vrezhon dishual.

Y.O.

#####

TAOLENN

Kemenn	p.III
Ur ger a-raok	p.V
Dec'h	p.1
Diougan	p.3
Distan	p.5
Gwerc'hezed	p.7
Diskar-amzer	p.9
Adkavidigezh	p.11
Didec'hadenn	p.13
Arouezvoud	p.15
Here	p.17
Dibenn ar bloaz	p.19
Yenijenn splann	p.21
Rezid	p.23
Tonkadur	p.25
Kizhier	p.27
Maronad dic'hlac'har	p.29
Targazh enkrezet	p.31
Rouanez harluet	p.33
Korker dizanv	p.35
Hiziv	p.37
Nedeleg	p.39
Ugentvet a viz Kerzu	p.41
Rozkudon	p.43
Heol ar goañv	p.45
Diskar an amzer	p.47
Labous all	p.49
Mouezh en noz	p.51
Ar c'hi-hemolc'h	p.53
Arzour	p.55
Glanded adkavet	p.57
Ren an Andeolion	p.59
Unan-ha-tregont a viz Kerzu	p.61
Bezvenn	p.63

Moulet gant "Keneiled Imbourc'h"

CPAPP : 50 015

An atebeg : Y. Ollivier

